

497

(432, suite)

Distrio
Eur Zoudard côs a Napoleon,
prizonnier er Russi.

Var ton : Domp-ni oll bremâ, va breudeur.

Reposomp dindan ar derven,
Pa m'eus anfin d'am poan termen!
Poqat rin d'am zad, d'am mam quèz,
Ha goude neuze d'am mestrez.

(433) Mar boan captif ha maleurus,
Graç da Zoue, me vo eurus,
Rac bremâ, p'ou rentet em bro,
Me vo erwad betê 'r maro.

Abas nebeut rin demezet,
Eur plac'h fur am bo da bried,
Hac un deiz, e cornic hon tan,
Dastumet oll, bras ha bian,

Me gonto dê ar maleuriou
A meus souffret nombr bloaverziou;
Ze rêt dê santout da jâmes
Pequey eurus voar assambles.

Mes, ô va Doue oll-buissant!
Va c'halonic zo languissant....
A dad, a vam, c'hoar ha mestres

Un privet erit eur jâmes.

(434) Eur gonsolation a meus
Gouest n'am priv get demes va c'heus:
E Paris, var ar golonen,
E ma va hano pen-da-ben.

Ar Franç atao qer generus
Vit e bugale maleurus
A deuz, me zo sur, d'am zicour,
Pa n'ellân ober neb labour.

Va oll joa, va oll esperanç
E zez quelet o rên en Franç
An union, al lealdet
En despêt d'e enemiet.

Ha p'am c'halvo Doue un de
Da vont dirac e vajeste;
Ra rin dign da vont da repos
Gant va zud qèz d'ar barados!
fin.

A. Lédan.

(Vol. IV, p. 432 - 434.)
9 str. numérotées.